

# GWERZ INTRON VARIA AR SKLERDED

(Parrez Plonevez-Portze)



—  
 tou : I.-V. Rumeurgol

I  
 El lec'h man Chapell ar Sklerded (1)  
 Gwechall goz ne veze gwelet  
 Nemet d'ar Werc'hez eur skeudenn  
 Dindan eun tammig-disklavenn.

## DISKAN

Intron Varia ar Sklerded,  
 Warlerc'h-hon Tadou ni ho ped,  
 Ro-it d'eomp nerz ha sklerijenn  
 Ma raimp-hon dever da viken.

## II

Da fin ar zeitek vet kantved (2)  
 War an Aotrich e oa lammet  
 An Turked, gouenn dud divadez,  
 D'ho heul tan-gwall ha lazerez.

## III

Ma reont o mistri war gêr Vienn,  
 Eman grêt gant ar feiz kristen :  
 War lezenn Jezuz diskaret  
 Lezenn Mahomet 'vo-savet.

## IV

Mouez ar Pab a zav da c'houlenn  
 Sikour an holl vroioù kristen :  
 « Savit, savit, tud badezet,  
 Torrit galloud ar bayaned. »

## V

Daoulinet dirak an aoter,  
 Pa zeuas d'ezan al lizer,  
 Roue Pologn, Sobieski,  
 A bede ar Werc'hez Vari.

## VI

« An Tad santel c'houlenn sikour ;  
 Ma n'her sikouromp n'ez omp gour.  
 Va zoudarded en em ganno ;  
 Gwerc'hez Vari, c'houi 'vo ganto. »

## VII

Da Hanter-Eost, gouel bras Mari,  
 Eo diblaset Sobieski.  
 Gant ugent mil a zoudarded  
 Evit roi lamm d'ar bayaned.

## VIII

'Vit difenn o relijion,  
 'Zay e pep bro tud a galon :  
 Mont 'ra eun toullad Fransizien,  
 En o zouez mab Aotrou Moellien

## IX

Da c'houel Maria-Wengolo,  
 Hep aon ebet rak ar maro,  
 Goude beza kommuniyet,  
 Sobieski 'dag an Turked.

## X

« D'ho kouel, Mari, omp diblaset,  
 D'ho kouel, Mari, hon eus taget ;  
 Mamm vat, harpit ho soudarded  
 Hag hoc'h anō a vo meulet. »

## XI

Gwall-rust e voe an abadenn :  
 Pôtréd Mahomet 'zalc'he penn.  
 N'eustorz! gantopell 'raok kuz-heol,  
 Dirak Vienn e voe an tu-goll.

## XII

Evit diskouez anaoudegez  
Ha laret bennoz d'ar Werc'hez,  
Ar Pab un'n gant Sobieski,  
'Zav gouel Anô Santel Mari.

## XIII

Mab Aotrou Moellien, deut d'ar gêr,  
A gonte da dud ar maner,  
Gant nerz-kalon Sobieski,  
E fiars er Werc'hez Vari.

## XIV

« Va zad, war hent Douarnenez,  
Savit eur chapell d'ar Werc'hez  
Meulomp enni ano Mari  
'Vel ma c'houlle Sobieski. »

## XV

Gant peziou melen ar maner  
Ha mouniz rouz an dud dister  
'Voe savet chapell ar Sklerded : (3)  
Gant an Eskob 'voe benniget.

## XVI

Hag ano Mari 'voe meulet  
Gant pardonerien ar Sklerded :  
'Velse da wir teuas gouenn  
Sobieski ha mab Moellien.

## XVII

Hed ar wech 'vit ar prizonier  
Gwerc'hez ar Sklerded a beder,  
Ha gant skoazell ar vamm dener  
E vez digaset yac'h d'ar gêr. (4)

## XVIII

'Baoue daou c'hant vloaz tremenet  
'Vez meulet Intron ar Sklerded  
Gant tud Plonevez ha wardro,  
Gwerc'hez Vari, ni 'gendalc'ho.



*Jacques Thoues*  
*Cure de Plouvez.*

(1) Daou bardon ar bloaz : d'an trede sul goude Pask, ha d'an eil zul a viz gwengolo.

(2) Er bloavez 1683, armeou an Turked a dostae ouz Vienn, kêr-benn Impalaer an Alamagn KerKent ha galvet gant ar Pab, Yann Sobieski, roue Pologn, daoust ne oa ket unan gant an Impalaer, a ziredas gant eun arme.

(3) War an tour e lenner 1739 hag ano an Aot. Talabardon, person ; war ar sekreteri, tu an hent, 1747, hag ano Moellien. Er bloavez 1740 'voe benniget ar chapell gant Eskob Kemper, an Aot. de Farcy de Cuillé, hag a oa d'e dud maner ha douarou Treseol.

(4) E kichen an nor-dal, e weler eun tamm chadenn digaset pell 'zo gant eur prizonier hag a oa bet diwallet gant Intron Varia ar Sklerded.

J. T.

IMPRIMATUR

Kerfeunteun, le 11 Septembre 1948.

J. COTTEN, v. g.